



RECIT

Eus a un Exempl éruet a neve.

Var un ton anavezet.



ME ho ped , Speret-Santel , da r i din scl rigen
Evit gallout dizcl rya etoues ar gristenien
Un exempl miraculus pini zo  ruet ,
Hac o tonet d e gompren eo troublet va speret .



Goude beza goulennet grac ar Speret-Santel ,
Hanval bras demeus unan e vignonet fidel :
Ar c'hopi miraculus-m  a voa bars en galleg ,
Ha me deu d e explica brem n e brezonec .



En drizec a vis even , er b oa eiz-varnugueut ,
Er sadorn ar Pantecost ; evit r i da entent ,
E m n ar gouel solemnel a Sant Min v niguet ,
A soulach ar gristenien ous a bep seurt cl nvet .





N'hon eus ezom da hênel , na da zistlinga ,
 Ous a bcp seurt cléavejou e peder ar Sant-mâ :
 Ha qement en em adress dezàn a vouir galon ;
 A recev soulajamant en e affliction .



En Departament al Loir, en Commun Bolbèqet ;
 En deus ur Chapel devot , gant an oll hénoret ,
 Frecantet ha respectet gant an dud affliget ,
 Eus a bemp leo varnuguent e feu pelerinet .



Merget eo bars er Scritur , hep conta fablenniou ,
 An devez eus ar pardon hac an induljamcou ,
 O heuill ar procession ha gant ar religou ,
 E ve ouspêñ dëc mil den , hep conta tud ar vro .



Lezomp ar solanite , explicomp ar mirac
 Pehini so éruet er plac santel ha mad ,
 Gant ur vezen so sayet e qichen ar Chapel ,
 Ar gäera a so guelet nep lec'h e Breiz-Izel .



He c'horf so cn musurach tenvoc'h eguet bojen ,
 He brancou en dro dezi a ro teyaligen ,

Ma cavet e ré domâch en deiz eus ar pardon,
Dre ma voa en darempret eus ar procession.



Ar Mér demeus ar Gommun hac e assessorat,
An Noter hac ar Greffier, hac an oll notablet
O deveus bel concluet formi un assamble
Vit ma vije transportet ar vezen ac'hane.



Dont a reont d'e guerza e profit ar Chapel,
Ar pris eus a zaouzec scoet, da sevel un Auter,
Dre ma voa quer frecantet gant ar belerinet,
Ma vije ofern vintin enni hac ofern-bred.



Hac o tonet d'e goerza, e conditionent
Ous an autrou e frene e peder-heur varnuguent
E rancje diampecha plaç d'ober ar pardon,
Pa voa var an darempred eus ar procession.



An autrou ra diguemen e oll artisanet
D'e discar ha d'e ztransport ermès eus ar verret;
Ha ma teuas pévar den, evel tud amportet,
Da zizôlo he griziou, ma vije discaret.



Evel ma c'habparichiont en qichen ar vezen,

È remergjont a ûs dê ur c'haer a-sclérijen,
 Evel an eol o para hac an amzer mouchet,
 Un experianç dezo e vijent surprenet.



Er c'henta tol a scojont , e teu var ar brâneou
 Lapousset a beurs Doue , spontus bras o moezion;
 A scoe var o diouscoas ha memes var o fenn ,
 Qent a renqent reculî a bell eus ar vezen.



Chom a rejönt da sellet an eil ous eguile ,
 Ha ma tigor dre he c'hreiz en daou bez diraze ;
 Ar pez o gra estonet , o tonet da sellet ,
 O deus guelet hor Zalver enni crucifiet.



Mént a ra ar pêvar des beto ti an autrou ,
 D'ober déclaration , ha d'annonç ar c'hélou .
 An autrou ous o c'hlêyet a so bet coleret ,
 Hac a guemer an dud-mâ evit seneantet.



Dent geneomp , me an dud-mâ , ha ni ho cassou
 plac :
 Hac e larfac'h rîi daou scoët demp evit pab toll-hach ,
 Na scoemp qet varnezzi ; ha c'houi , mar doc'h hardi ,
 A scyo an toll genta , emezo , varnezzi .

Dont a ra'n autrou gante da guichen ar Chapel,
 En ur vlasfemi Doue , dre e hano santel ;
 Er c'henta tol a scoas e crenas an douar ,
 Hac e coezas dirage ar maleurus barbar.

Cetu ma vcent obligeet da zouguen an autrou
 D'ar guer gant tristidiguez da aponç ar c'hêlou ;
 Laqet e voe'n e vele , gant e dud sebeliet ,
 Ha peder heur varnuguent goude zeo decedet .

Ar brud ya dre ar baros demeus an exempl-mâ ;
 Ar person vel ma clêvas a deu d'awertissa
 E oll barossionis d'en escort hep appel ,
 Da vont e procession betec ar plac santel .

Mont a ra'r bêleg santel ha touchet e galon ,
 Betec ar Chapel devot gant e brocession ;
 Oferenna ra enni d'e oll asistantet ,
 En henor da bassion hor Zalver beniguet .

Pa sevjont en aviel , e voe ur sclérijen
 A ūs d'an asistantet epad deg minuter .

Qen e voent epouvantet, ma eo ejont d'an daoulin,
Da bresanti o feden dirac hor Mestr divin.

Pa voa ebars er c'homzou ar gonsecration
E coezas var an Auter dirac an den guirien
Eul Lizer a so scrivet gant hor Mam ar Verc'hes
Dirac he Mab beniguet, hor gwir Avocades.

Goude ar venediction, e crogas el Lizer,
Hae en deus-àn bet lehnnet d'ar bobl en ber-amzer,
Hac e lar demp, pec'herien, d'ent da chench a vue,
Pe e vezimp punisset gant justic hon Dove.

Ebars e fin ar récit, pa vo eat var baper
Qement a déui d'e frena a velo al Lizer,
Ar proposou varnezàn, capabl da douch calon
At bec'herieu obstinet hac an dud dirézon.

An ini en deus formet ar composition
Divar ar c'hopi galleg ebars langach bison,
Yan ar Guenn eo e hano, pemp bloas hac anter-cant,
O chom e paros Pleuyel, natif a Blougescant.

F I N

C O P I

Eus al Lizer miraculus-mâ.

En Hano an Tad, ar Mab, hac ar Speret-Santel.
Athen.

O Tadou ha Mamou, carguet a iniqite, emezhor Zalver, da bep heur ha da bep moment e c'houzennit diganén ar peoc'h, ha c'houi oc'h-unan eo a livr din hep paouez ar brezel, o sonfr bep moment ho pugale da douet ha da vlasfêmi va hano santel. Lavarat a rân dêc'h ar virioneou-mâ deus a c'henou va Mab quer : « Ma na deuit qet d'en « em amandi ha d'en em gorrija deus ar pechegoù « pere a gommetit an eil hac eguile, me a zigassø a dêc'h sinou deus ar re estonussa ebars en astrou « hac en clemanchou, gant an euzussa crenamant « dôuar, evit merq eus va venjanç hac eus va « c'holer justamant irrijet en oc'h enep. Cass a rih « dêc'h ar brezel, ar guernic hac ar vocen, hac « assambles an oll drougou all. Ho loenened a be- « risso; beza e vezot en sur fêcon qen a ye a boan « dêc'h anavezout an eil eguile ac'hanc'h, ma na « deuit da gredi piusamant ar vouirioneou-mâ. Béza

« e vezot maleurus ganén deiz ar varn ; ho pec'hé-
 « jou a attir ha varnoc'h ha var ho pugale va
 « maledictionou ; ho leou-douet a enep va hanou
 « 'santel', ho impureteou , ho mesventiou , ho plas-
 « fémou a enep ho pugale , ho coel deodadou ,
 « ho calomniou an eil e qever eguile , ha mil grim
 « all muioc'h enorm. »

Va bugale haour , na c'houleñnan qet ho coll :
 na c'houleñnan nemet ho conversion. Grit an aluzen
 d'ar beorien , pere eo ya memprou , ha neuze e vel-
 fet ho pargeyer muioc'h fleurissant ha muioc'h abon-
 dant en pep tra ; ha me à royo déch' va graçou ha
 va benediction , gant ma talc'hot mat d'am gonrc'he-
 mennou ha da re ho Mam santel an Iis. Pedit ha
 pedit hep paoues va Mam Santel ; ma teuyo gant
 gruez ha misericord da brouri déch' ar pardon hac
 ar remission eus ho pec'héjou. Rei a ran déch' bem-
 dez mercou eus va c'harante ; c'houi a so va bugale
 ingrat , ha me pehini a so un tad mad ha liberal
 bepret en hoc'h andret. *Miserere mei , Dei : secun-*
dum magnam misericordiam meam. Amen.

F. I. N.

